

Embannet gant Skoazell
Kuzul Departamant Penn ar Bed
Kuzul Rannvro Breizh



© Keit Vimp Bev – Jean Patern Ars
Skeudennoù : Nathalie Almange
Kempennet gant Mich Beyer
© Tous droits réservés – Pep gwir miret strizh
ISBN 978-2-86824-327-0
ISSN : 2552-3546

Jean Patern Ars

Pêrig a wel mat



2019

Ar skol a oa o paouez echuiñ hag o tistreiñ d'ar gêr e oan. Treuziñ a ris an hent evit mont d'an ti-bara. Digor e oa an nor pa 'z antreis.

– Demat deoc'h, a lavaris d'ar vaouez a oa o renkañ traoù en ur sal vihan a-dreñv ar c'hontouer.

– Demat paotr yaouank, emezi. Penaos emañ ar bed ganeoc'h ?

– Mat eo, Itron Foreg. Gallout a ran prenañ ur vegetenn hag ur gornegenn, mar plij ganeoc'h ?

– Ya, evel-just, ma bihanig, evel da gustum. Mont a ra gant ho tud ? Pell zo n'em eus ket gwelet anezho...

– Ma mamm zo skuizh er mare-mañ ha ma zad zo o paouez bezañ oberataet, neuze...

– Ya, kompren a ran. Kemerit se.

Reiñ a reas ar vegetenn din hag ur sac'hig, ar gornegenn ennañ. Paeañ a ris hag adkemer hent ar gêr. Jentil e kaven plac'h an ti-bara. Atav e veze ur mousc'hoarzh ganti war he dremm. O c'hortoz e-kichen ar gouleier triliv e teufe an den bihan da vezañ gwer e tigoris ar sac'hig evit debriñ ma

c'hornegenn. Souezhet e voen rak div gornegenn a
oa e-lec'h unan. Sur e oan em boa paet evit unan
nemetken. Profet e oa bet an eil din gant an Itron
Foreg, plac'h an ti-bara.

« Pegen jentil eo. Graet e vo un dresadenn ganin
eviti. »



Gwer e teuas an den bihan da vezañ hag e treuzis an hent. Tost echu e oa ganin debriñ ar gornegenn gentañ pa erruis er gêr. Lipat a ris ma bizied a-raok treiñ dornell an nor. Lavarout a ris gant ur vouezh kreñv hag uhel evit bezañ klevet mat :

– Demat ! Erruet on.

Respont ebet ! Sellout a ris mat e diabarzh ar sal vras. Netra ne fiñve war-bouez ur gelienenn o nijal etre an daol hag ar prenestr. En hon ti ne oa ket kalz a bezhioù-arrebeuri, nemet an traoù pouezusañ a veze implijet bemdez ganeomp : e-kreiz ar sal un daol evit debriñ, kadorioù tro-dro dezhi, ur gourvezvank, un daol all met izeloc’h ha bihanoc’h ivez gant un doubier warni, hag ouzh ar voger dibrenestr un armel goad ma oa holl baperioù ma zud renket mat.

Ne oa ket peogwir e oa treut ar peuriñ ganeomp met peogwir e soñje ma zud e oa gwelloc’h deomp chom hep traoù ouzhpenn ha didalvoud. Evidon-me ne oa ket pouezus rak lodenn vrasañ ma buhez a dremenenn em c’hambr.

Evel ur bedig e oa ma c’hambr evidon. Ar bed-se a oa bet savet ganin, tamm-ha-tamm, ha me oa an hini nemetañ o c’houzout ar reolennoù hag ar c’hodoù am boa savet evitañ.

– Ma labousig ? Erruet oc’h ?

Dont a rae ar vouezh eus an estaj kentañ. Klevet e oan bet gant ma mamm sur a-walc'h. Respont a ris buan :

– Ya, Mammig. Prenet em eus ar bara. Lakaet e vo ganin war an daol, okay ?

– Trugarez, Pêr. Deuit amañ da gontañ ho tevezh din.

Lakaat a ris ar vagetenn e-kreiz an daol ha buan e pignis gant an diri. Ma mamm a oa en hec'h azez war ur gador gozh, ouzh ma c'hortoz en ur selaou sonerezh klasel. Pa glevas e oan oc'h erruout e savas da goulouchal ac'hanon.

– Penaos 'mañ kont, ma labousig ?

– Mat-tre ! Ne oa ket re hir an devezh-skol. Mall 'oa warnon distreiñ d'ar gêr da echuiñ lenn al levr am boa kroget dec'h, diwar-benn Egiptiz.

– Egiptiz ? Soñjal a rae din e oac'h o lenn unan diwar-benn an eil brezel-bed...

– Ya gwir eo, lennet em boa unan met echuet e oa bet ganin dec'h.

– Laouen on e lennec'h kement-se. Chañs ho peus ! a lavaras ma mamm en ur vousec'hoarzhin.

– Gallout a rin ober un diverrañ deoc'h goude, pa vo echu lenn ganin.

– Jentil 'vefec'h.

Ma mamm a vousec'hoarzhe c'hoazh. Me 'oa laouen o vezañ ganti. Eviti ne veze ket aes an traoù bemdez. Alies e veze trist hag e klasken ober eus

ma gwellañ evit lakaat ur mousc'hoarzh da zont en-dro war he dremm.

– Ar bloaz o tont e voc'h er skolaj. N'oc'h ket re nec'het da vont d'ul lec'h nevez, bras ha tout ?

– N'on ket mammig. Ne vo kudenn ebet ganin evit anavezout mat ar savadurioù. N'eo ket bet diaes din erruout er skol nevez ar blez-mañ, neuze ne vo ket diaesoc'h ar blez o tont. N'on ket mui ur bugel. Bremañ en em zibaban mat ma-unan-penn.

– Ya, met n'on ket ...

– Na rit ket bil, Mammig. Na rit ket bil.

Kemer a ris dorn ma mamm ha flourañ anezhañ evit he dinec'hiñ. Unnek vloaz e oan ha ne oan ket mui ur bugel, met eviti e oan unan c'hoazh. Diaes e oa dezhi ivez kompren e c'hallen en em zibab mat er gevredigezh : er skol, war an hent ha kement 'zo. Aon he doa ne c'hallfen ket ober an traoù ma-unan, rak e ken kaz e c'hoarvezfe ur gudenn ne vije ket posubl dezhi dont d'am sikour. Din-me e oa da brouiñ dezhi e oan gouest d'en em zibab ma-unan.

– Kit da lenn, ma labousig, met na zisoñjit ket ober ho labour-skol.

– Graet e vo ganin a-raok mont da zebriñ, Mammig.

– Emaon-me o vont da seniñ piano.

Kemer a ris he brec'h hag ambroug anezhi betek ar piano. Plijout a rae din bezañ tost ouzh ma

mamm, kemer he brec'h, he dorn pe moumounañ anezhi. Pa voe azezet-mat e krogas da seniñ. Pegen brav e oa ar sonerezh-se ! Ne oan ket sur penna-da-benn met d'am soñj e oa ur pezh kompozet gant Mozart. Treiñ a ris kein diouti hag ez is d'am c'hambr. Lakaat a ris ma sac'h-skol e-kichen ma burev ha choukañ war ma gwele. Pebezh plijadur e oa bezañ evel-se o tiskuizhañ en un aergelc'h ken sioul ha blot. Dre ar prenestr e welen an oabl a oa glas a-feson ha digoumoul. Dont a reas son ar piano betek ma divskouarn tra ma oa ma mamm o kregiñ gant ur pezh sonerezh all. Ma vijen bet skuishoc'h em bije kousket evel-se, azezet war ma gwele, ma fenn ouzh ar voger, met traoù pouezus am boa d'ober. Ret e oa din lenn ma levr diwar-benn Egiptiz. C'hoant 'm boa da c'houzout penaos e oa bet savet ar piramidennoù ganto.

Soñjal a ris un eilenn er pezh a oa bet lâret gant ma mamm e-keñver al labour-skol, met ne oa ket kalz a labour d'ober e-kerzh an dibenn-sizhun-mañ. Ret e oa deomp deskriviñ pe tresañ poltred un haroz a blije deomp. Evit ar poent n'em boa ket kalz a vennozhioù met kavet e vefe dre lenn.

Atav on bet plijet gant al levrioù. Din-me e oa pouezusoc'h c'hoazh lenn rak ma zud ne ouient ket lenn. James n'o doa bet tu da zeskiñ lenn. Setu perak e lennen kalz, evit kontañ dezho istorioù a veze kavet el levrioù. A-wechoù e lennen ur pennad pe zaou dezho met kavout a raen hiroc'h

lenn a vouezh uhel eget lenn em fenn. Setu ma veze gwelloc'h ganin lenn ul levr en a-raok ha prientiñ em fenn un diverrañ ha goude kontañ anezhañ dezho.

Kroget em boa da lenn pa oan bihan-tout. N'em boa na breur na c'hoar hag hir e kaven ma amzer o c'hoari ma-unan em c'hambred. P'em boa komprenet e oa posubl din dizoleiñ ar bed dre al levrioù, ober anaoudegezh gant tud disheñvel, mont en avantur Doue en istor, ne voe ket posubl din paouez da lenn ken. Kavet e oa bet ganin mignonet, avanturioù hag istorioù da gontañ d'am zud.

Paouez a ris da zebriñ soñjoù ha kemer ma levr a oa chomet digor war ar bajenn ziwezhañ am boa lennet. Beuziñ a ris e hollved Egiptiz.



Buan e rede an amzer ha klevout a ris mouezh ma mamm o c'halver ac'hanon da zont da zebriñ. Soroc'hal a ris un tammig peogwir ne felle ket din paouez gant ma lennadenn e-kreiz ur pennad, met ne oa ket posupl din lezel ma zud d'am gortoz. Cheñchamant a oa bet en oabl ivez ha koumoul du a welen bremañ.

« Sur-a-walc'h e vo glav e-pad an noz. »

Buan e tiskennis gant an diri. Ma zad a oa azezet war e gador e-tal dezho ha ma mamm a oa c'hoazh er gegin. Mont a ris da bokat d'am zad.

N'em boa graet na ma labour-skol, nag an dresadenn evit ar varaerez.

« Ret e vo din ober a-benn àrc'hoazh mintin ! »

– Mont a ra ,Tadig ? Tuchantik oc'h distroet ?

– Gwelloc'h ya. Ya, erruet on tuchantik. E ti ar medisin e oan. Lavaret 'n deus din e c'hallin adkregiñ gant ma labour a-benn un nebeud devezhioù. Mall zo warnon.

Oberataet e oa bet ma zad abalamour d'ur poread en doa bet war e lagad dehoù. Aon am boa bet peogwir e oa bet diagnostiket ar poread-se diwezhat hag e oa chomet ma zad ur sizhunvezh en ospital dindan evezh. Pa oa distroet d'ar gêr e oan bet disammet ha ma mamm muioc'h c'hoazh. Int o-daou a oa tost-tre an eil ouzh egile, ha pa vanke unan e chome egile trist ha kollet. Me a gare ma zud ha na oant ket tud evel ar re all.

– Ar mezeg en deus lavaret din ne welin ket gwelloc'h goude, met ne welin ket gwashoc'h kennebeut, a lavaras ma zad en ur c'hoarzhin.

Ma zad ha ma mamm, o-daou, a oa dall. James n'o doa bet tu da welout tra ebet. Ar vuhez pemdez

ne veze ket aes dezho, setu perak e oant harozed evidon. A-viskoazh em boa ranket bezañ ur bugel aes rak evito ne veze netra aes d'ober. Gant-se e oan em zibabet buanoc'h eget ar vugale all ha ret e oa bet din deskiñ abred sikour ma zud evit traoù ar vuhez pemdez. Setu perak em boa komprenet buan e oa pouezus lenn evit sikour anezho er stalioù, gant al lizhiri, evit lenn paperioù ar velestradurezh ha kement 'vez.

– Ezhomm ho peus sikour Mammig ?

– Pas, mat eo, tost poazh eo ar patatez.

– Petra ho peus desket er skol hiriv ? a c'houlennas ma zad.

– Traoù diwar-benn geometriezh. Ne oa ket aes, met gwashoc'h zo bet memes tra. Hag er gentel Istor hon eus komzet diwar-benn buhez Loeiz XIV. Anavezout a raen un tammig eus e vuhez dre ul levr am boa lennet ar bloaz tremenet met desket em eus traoù nevez, da skouer : gouzout a rit e oa bet Loeiz XIV roue abaoe e vugaleaj ? Pemp bloaz e oa pa oa deuet da vezañ roue Bro C'hall. Soñjit 'ta : me, roue 'vefen abaoe 6 vloaz dija ma vijen bet en e blas.

– Hag ur roue hag a gomzfe re ha ne zebrfe ket, eme ma mamm hag a oa o tont gant ur gastelodenn vras. N'ho peus ket kroget c'hoazh gant ho karotezennoù.

Gwir e oa e komzen re, met an Istor a oa ken dedennus ma ne c'hallen ket chom hep komz

diwar he fenn. Ma hunvre brasañ a oa bezañ arkeologour pa vefen aet da zen deuet. Amzer 'oa ganin c'hoazh da dreiñ mennozh met d'am soñj e vefe ur vicher tro-dro d'an Istor.

Goude koan e tistrois d'am c'hambri hag e lennis un tammig a-raok lazhañ ar gouloù. Ne voe ket re ziaes din kousket d'an noz-se rak skuizh e oan goude un devezh leun a zarvoudoù.

Dihunet e voen e-kerzh an noz gant un trouz a gleven er-maez : an diaoul o pilat e wreg ! Aon am boa bet rak ar c'hurun pa oan bihan-tout met echu e oa a-benn neuze, ha pa voe deuet an oabl da vezañ siouloc'h en-dro e c'hellis menel kousket adarre.

Gouloù an heol o tremen dre ar stalafioù a zihunas ac'hanon ar mintin-se. Chomet e oan em gwele un tammig pelloc'h evit ober ma mad eus ma gwele blot. Brav e oa din evel-se, na tomm na yen ne oa din. Pa voen dihunet da vat ez is d'ar sal-dour da walc'hiñ ma dremm. Klask a ris fichañ ma blev en un doare mat tamm-pe-damm met evel da gustum e savas ur guchennad vlev a-bik war ma fenn. Ar mintin-se em boa muioc'h a amzer eget ar mintinvezhioù all rak Sadorn a oa.

Ur mignon din a zeufe em zi hiriv. Axel e oa e anv. Komz a rae brezhoneg met eus su Bro-C'hall e oa deuet un nebeud mizioù a oa. A-wechoù e rae fazioù. Fentus e kaven se da glevet. Mall 'oa

warnon ez errufe. Da zek eur en doa lavaret din an deiz a-raok. Teurel a ris ur sell war an horolajig a oa e-kichen ar gwalc'heris. Nav eur a oa merket gantañ. Chom a rae un eurvezh din evit debriñ, renkañ ma c'hambur un tammig, daoust ma ne oa ket direnket-tre, hag adkavout c'hoarioù-stroll en armel-voger.

Er gegin ez is da zebriñ un tamm briochenn gant koñfitur sivi warni. Kemer a ris ur werenn ha leuniañ anezhi gant chug orañjez a oa er yenez. Pouezus e oa d'am mamm lakaat ac'hanon da zebriñ a bep tra evit bezañ sur e vefen ur paotr desket mat.

Pa voe echu ma briochenn ez is en-dro d'am c'hambur da renkañ. Ret e oa lâret e oa ma c'hambur lous hag en dizurzh. Ne gemeren ket amzer da renkañ anezhi. Pa c'houlenne ma mamm diganin renkañ, alies mat e lâren em boa graet daoust ma ne oa ket gwir tamm ebet. Lakaat a ris al levrioù a oa war al leur em armel-levrioù, digeriñ ar prenestr evit lakaat aer fresk da zont en diabarzh hag aozañ a ris ma gwele en-dro.

Klevout a ris kloc'hig dor an ti. Diouzhtu e savis hag e redis d'an traoñ da zigeriñ an nor da Axel. Pa oan o redek e-biou kambur ma zud e klevis ma mamm o lavaret din :

– Diwallit Pêrig. Na reit ket en diri ! Emaoc'h o vont da gouezhañ....

Met re ziwezhat e oa, e-tal an nor e oan dija.

Digeriñ a ris frank an nor, war an treuzoù e oa
Axel hag e vamm.



- Demat deoc’h, mont a ra itron Leblanc ?
- Ya, mat-tre ! Ne choman ket pell amañ rak a-benn ugent munutenn e vin o labourat en tu all eus kêr-Wened. Dont a rin da gerc’hat anezhañ da 7 eur noz. Mat eo ?
- Ya, dispar, itron Leblanc.
- Mat ! Pokoù, Axel, ken fenoz !

Ne chomas ket e vamm da c’hortoz e respont ha kuitaat a reas ac’hanomp buan da zont en-dro d’he c’harr-tan.

- Amzer ho peus bet da zebriñ ar mintin-mañ ? a c’houlennis ouzh ma mignon.

A-wechoù e teue Axel d’ar skol marnaoniet peogwir e tihune re ziwezhat. Ur sac’h goullo ne chom ket en e sav, a lavare ma zad-kozh pa oan bihan, setu perak e tegasen bemdez un dra da zebriñ evitañ betegouzout en defe naon.

- Amzer am eus bet, ya, trugarez Pêr ! Lavaret em eus deoc’h dija : e-pad an dibennoù-sizhun em bez muioc’h a amzer diouzh ar mintin. Ma zad ne vezont ket kement a brez warno hag e-pad ar sizhun.

- Petra eo o labour ? a c’houlennis.
- Ma mamm a labour en un ti-bank ha ma zad zo reizhaouer. Hag ho re ?
- Ma zad a labour hanter-amzer nemetken en un embregerezh-asurañs m’emañ e-karg eus ar pell-

gomz ha ma mamm ne labour ket abalamour d'he namm.

– Nammet eo ho mamm ?

– Ha ma zad ivez, ya... Dall int.

– Ne ouien ket, a lavaras Axel gant ur vouezh trist.

– Na rit ket bil, se ne cheñch netra a-benn ar fin.

En ur gaozeal etrezomp ez errujomp er sal vras. Digeriñ a ris un armelig vihan a-dreñv dor ar sal da gemer c'hoarioù-stroll a oa enni. C'hoari a raen alies c'hoarioù-stroll gant ma zud. Posupl e oa d'am zud c'hoari ganto daoust dezho bezañ dall. Diskouez a ris anezho da Axel evit e lezel da zibab an hini a gavfe ar gwellañ.

– N'ho peus c'hoari video ebet ?

– N'hon eus ket ar skinwel, siwazh... A-wechoù ez an didrouz da c'hoari gant urzhiataer ma mamm... Met na lârit ket se dezhi ! Marteze e c'hallimp c'hoari gantañ pa vo aet kuit eus an ti goude merenn !

Kavet e oa bet ganeomp ur c'hoari-stroll a oa posupl deomp c'hoari buan rak anavezet e oa ar reolennoù ganeomp hon-daou en a-raok. Ur c'hoari kartoù e oa. Ar pal a oa sevel bernioù kartoù ha respont d'ar goulennoù skrivet war bep kartenn evit dastum poentoù.

Start e voe an traoù er penn kentañ ganin met tamm-ha-tamm e tistrois er jeu daoust ma chome lañs gant Axel. Pa oa tost echu ar c'hoariadenn e

teuas ma mamm d'hor c'haout. Axel a savas da lavaret demat dezhi met p'en em gavas tost outi e chomas abafet un tammig evel ul logodenn e-tal un olifant. Sur e oan e chome evel-se peogwir ne ouie ket petra ober d'he saludiñ abalamour d'he namm. Daoulagad ma mamm a fiñve buan, evel un horolaj diroll. Alies mat e rae aon d'an dud peogwir ne oant ket kustumet. N'en doa ket c'hoant Axel d'ober ur fazi ganti setu perak e kemeris dorn ma mamm hag e lakais ma eil dorn war he skoaz. Tostaat a ris ouzh he dremm ha pokat a ris dezhi en ur lavarout :

– Mont a ra, Mammig ? Axel zo erru hag o c'hoari kartoù emamp.

Pellaat a ris diouti hag e rois plas da Axel d'he saludiñ. Ober a reas evel m' am boa graet a-raok. Ne oa ket asur gant e jestroù...

– Demat Itron Ozon. Trugarez deoc'h da zegemer ac'hanon en ho ti.

– Ur blijadur eo, paotrig. Digor eo hon ti evit mignoned hor mab.

Paouez a reas da gomz en ur vousec'hoarzhin dezhañ ha treiñ he fenn war ma zu :

– Pêr, ret e vo deomp mont da breññ an defotajoù. N'em eus prenet tra ebet da zebriñ evit lein hiriv. N'ouien ket petra a blijfe deoc'h debriñ ! Petra ho po Axel ?



Sellet a ris etrezek an nec'h pa lâras ma mamm e oa ret deomp mont da brenañ an defotajoù. Fellout a rae din chom er gêr da c'hoari gant an urzhiataer !

– Klevet 'm eus ac'hanoc'h, Pêrig ! Ezhomm am bo ac'hanoc'h er marc'had, neuze ma fell deoc'h debriñ un dra bennak hiriv e vo ret deoc'h dont ganin.

A-wechoù e oa gouest ma zud da c'houzout e oan hegaset nemet dre selaou aketus.

Axel a oa chomet en e sav em c'hichen, abafet un tammig rak ma mamm. Gouher e vez atav, met da gustum gant tud a anavez ne chom ket ken lent.

– Din-me 'vo mat ar pezh ho peus c'hoant...

– Ne vo ket aes dibab ar pezh 'vo prenet ganeomp ma n'ho peus mennozh ebet.

Ma mamm he doa lavaret se gant ur mousc'hoarzh evit bezañ sur e vije degemeret mat he mousfent gantañ.

– Axel a gav mat tout an traoù a blij din. Setu e vo posupl deomp debriñ pizzaioù marteze, a lavariz evit sikour ma mignon.

– Ya, OK, mat-tre. A-benn un hantereurvezh ez aimp d'ar marc'had neuze. Mat eo deoc'h ?

– Mat eo !

Ma mamm a guitaas ar sal vras ha gallout a rejomp echuiñ ar c'hoariadenn.

E-kerzh unan eus e droioù e c'houlennas Axel diganin :

– Penaos ez aimp d'ar marc'had ? Posupl eo d'ho mamm bleniañ ?

– N'eo ket. Re zañjerus vefe...Ret eo deomp mont gant ar c'harr-boutin.

– N'eo ket re ziaes dleout em ober diouzh euriadoù ar c'harr-boutin ?

– Er penn kentañ e c'hall bezañ diaes, met bremañ ez eo anavezet tout an euriadurioù ganin dre 'n eñvor.

Echuet e voe hor c'hoariadenn buan a-walc'h. Koll e oan met tost e oan bet da c'hounit. Un tamm amzer a oa ganeomp c'hoazh da vont d'am c'hambr evit he diskouez da Axel. Chom a reas a-sav pa welas ma armeliad levrioù.

– Woahh ! Pet levr ho peus ?

- N'ouian ket mat pet 'm eus met un dra a zo sur eo 'm eus lennet anezho tout !
- N'eo ket gwir !
- Geo ! Pa zistroan eus ar skol ez an war-eeun da lenn. Ret e vefe deoc'h lenn ivez evit anavezout traoù dedennus en istor ha tout.
- Ya, un tamm a lennan, met kentoc'h bannoù-treset pe mangaioù. Goude ar skol e ran c'hoarioù-video ha traoù a seurt-se...
- Ah ya ! Ur skinwel ho peus ?
- Ya, hag ur Playstation nevez !
- Chañs 'peus ! Ma zud ne welont ket, neuze ne fell ket dezho preniñ ur skinwel... Ouzhpenn-se e soñj dezho n'eo ket mat evit ar vugale peogwir e vez feulster alies.

Un didrouz en em stalias goude ma frazenn ziwezhañ. Axel a gemeras ul levr hag a oa war an armel.

- Setu perak e anavezec'h ken mat ar ragistor ? Lennet 'poa tout el levr-mañ en a-raok ! Unan 'peus diwar-benn ar varc'hegourien ? Dedennet 'vefen da lenn unan diwar o fenn peogwir on bet plijet ganto a-viskoazh.
- Ya evel-just 'm eus unan diwar-benn ar Grennamzer. Kemerit ar pezh ho peus c'hoant, a lavarit en ur astenn muioc'h a levrioù eus an armel dezhañ. Kemer a reas anezho ha dibab unan. Adlakaat a reas ar re all en armel.
- Reiñ a rin deoc'h en-dro ar buanañ ma c'hallin.

- Kemerit hoc’h amzer ! Lennet ‘m eus anezhañ dija, n’eus ket prez bras warnon.
- Trugarez deoc’h !

Kinnig a ris dezhañ c’hoarioù a oa em c’hambr : legoioù, pezhioù playmobil, pezhioù warahmmers ha ma c’hartennoù Yu-Gi-Oh. An amzer a dremenas buan ha ma mamm a c’halvas ac’hanomp da ziskenn da vont da brenañ an defotajoù.

Mont a rejomp eus an ti betek an arsav karr-boutin tostañ eus hon ti. Gwelout a raen Axel o teurel selloù d’am mamm evit gouzout penaos e rae an traoù. Ne lavariz netra rak soñjal a rae din e oa un emzalc’h reizh. Ranell eo an dud gant an traoù dic’hortoz dezho. Axel a glaske bezañ evezhiek d’an nebeutañ pa daole e selloù ouzh ma mamm, er c’hontrol d’al lodenn vrasañ eus an dud a baoueze da vale evit sellout outi. Dre chañs ne veze ket direnket ma mamm peogwir ne wele ket ar selloù-se outi, met gloazus e veze din-me ! Pa erruas ar c’harr-boutin e sikouris ma mamm da bignat e-barzh. Reiñ a reas arc’hant d’ar blenier evit paeañ e dikedenn da Axel. Ma mamm ha me hor boa ur gartenn peogwir e veze ret deomp mont gant ar c’hirri-boutin ordin, bep tro ma kuitaemp ar gêr.

Tra ma oa Axel o teiziadañ e dikedenn e klaskas ma mamm ur plas da azezañ er c’harr-boutin.

Leun e oa ha tout ar plasoù a oa bet kemeret dija. A-dastorn e klaskas unan dieub. Dre chañs e oa ar blenier o c'hortoz, rak a-wechoù e veze blenierien ha na c'hortozent ket ha div wech e oa kouezhet ma mamm er c'harr-boutin dija. Tout an dud er c'harr a oa o sellout outi, al lodenn vras anezho gant ur sell du, o soñjal en dale e oa ar c'harr-boutin o tapout dre c'hortoz anezhi. Plasoù ar re ampechet a oa div blac'h yaouank azezet warno ha klask a raent sellout e pep lec'h met pas war-zu ma mamm evit chom hep fiñval. Dipitet e oan c'hoazh gant emzalc'h an dud, betek ma teuas Axel d'am c'hichen.

– Ne welit ket oc'h azezet war blasoù ar re ampechet ? Un namm ho peus ? N'ho peus ket ? Setu fiñvit buan ! a lavaras Axel a vouezh uhel en ur sellout drouk ouzh ar merc'hed.

An div blac'h a voe souezhet-tout, ha me kement all, met goude sellout a bep tu e komprenjont e oa bremañ an dud o sellout outo. Gant ur sell leun a hegaz e savas an eil plac'h hag eben d'he goude, da vont da foñs ar c'harr-boutin.

Treiñ a ris ma fenn da sellout ouzh Axel. Liv ar fulor a oa war e zremm met pa welas e oan o sellout outañ e cheñchas hag e vousc'hoarzhhas din evel pa vije bet disoñjet an droug en un eilenn. Hejañ a ris ma fenn d'e drugarekaat.

Azezet e oa ma mamm bremañ hag o vont d'an takad-kenwerzh e oamp. Me a oa chomet en ma sav, hag Axel kement all. Souezhet e oan c'hoazh gant emelladenn Axel. Din-me e oa abaf Axel : ne gomze ket kalz er c'hlas ha ne gomze nemet pa veze goulennet un dra bennak digantañ. Sklaer eo e oan souezhet met war an tu mat !



Er c'harr-boutin-se ne veze ket lâret anvioù an arsavioù. Evit an dud dall e oa dibosupl gouzout pelec'h e tremene ar c'harr-boutin estreget dre gontiñ an arsavioù. Met a-wechoù ne chome ket ar c'harr-boutin a-sav, pa ne veze den ebet o c'hortoz ha den ebet d'e guitaat. Setu perak e c'houlenne alies ma mamm :

– Pelec'h omp erruet ?

Ha me da respont dezhi :

– A-benn tri arsav e vo mat deomp, Mammig.

Axel a seblante magañ truez un tamm dre ma tizoloe tamm-ha-tamm pegen diaes e vez buhez un den dall. Bep tro ma paoueze ar c'harr-boutin e teue tud nevez e-barzh hag alies mat e sellent ouzh ma mamm. Axel a daole dezho ur sell du en-dro, evit lakaat anezho da baouez.

Pa voemp erruet gant hon arsav e lâris d'am mamm :

– Erruet omp, Mammig. Kemerit ma brec'h.

Ma brec'h a gemeras evit mont buanoc'h er-maez. Goude bezañ lâret kenavo ar blenier a serras dorioù ar c'harr-boutin, hag a gendalc'has gant e hent. Ma mamm a gemeras he bazh-vale e-barzh he sac'h. Diblegañ a reas anezhi.

Ar pezh a oa mat gant he bazh eo e veze aesoc'h dezhi bale war ar riblennoù-straed. Evel-se en em ziblase mat hec'h-unan e kêr. Met gwashoc'h e oa

c'hoazh e-keñver ar selloù taolet outi. Dibosupl e oa mont d'ul lec'h bennak hep bezañ remerket gant an dud. Hag hiriv evel an deizioù all ne c'helljemp ket tremen hep bezañ gwelet. Souezh ebet ! Dreist-holl en ul lec'h evel hennezh, en un takad-kenwerzh gant kalzig stalioù a bep seurt. Tud a oa o pourmen e pep lec'h tro-dro deomp. Ar pezh a zegase ar muiañ a aon din e oa an diriruilh a oa ret pignat ganto evit mont e-barzh ar stal. Bewech e vezen nec'het evit ma mamm rak ur wech, pa oan bihan, e oa kouezhet enno hag e oa bet ret dezhi mont d'an ospital. Aon 'm boa rak an ospitalioù abaoe se ivez.

Evel da gustum evit bezañ sur ne gouezhfe ket ez is dirazi. Dre chañs e tremenas mat an traoù an deiz-se... Huanadiñ a ris gant an disamm.

Erruet dirak dor ar stal e kemerjomp ur baneruilh evit lakaat an aferioù e-barzh. Mont a rejomp e-barzh ar stal ha tremen a rejomp e-bioù astell ar bannoù-treset hag ar c'hoarioù-video.

– Pa vezan o prenañ an defotajoù gant ma mamm e laoskan anezhi evit chom amañ da c'hoari pe da lenn. a lavaras Axel din.

– Ya, atav 'vez bugale dirak an astell-mañ, met ne c'hallan ket ober kement all, me, peogwir e vez ret din sikour ma mamm da dapout ar produioù.

Axel ne respontas ket ha chom a reas bout betek ma voemp erruet dirak astell ar pizzaioù. Ret e oa

din sikour ma mamm, dre gemer he brec'h, evit treiñ war an tu ma oa da vont peogwir ne oa netra er stalioù evit sikour an dud dall d'en em ziblasañ o-unan e-touez an astelloù.

– Ma labousig ?

– Mamm !!

Ne blij ket din an anvioù seurt-se pa veze mignoned din tro-dro. N 'em boa ket c'hoant da vezañ gwenn ar goapadennoù er skol. Ha pa vije jentil-tout Axel ne 'm boa ket c'hoant da glask c'hoari seurt jeu. Sellout a ris war-zu ma mignon evit gouzout hag-eñ e oa bet klevet gantañ ha kompren a ris e oa bet, o welet e vousec'hoarzh.

– Na rit ket bil Pêrig ! Ma mamm a lavar din alies : « ma c'hazhig bihan ». Setu, kompren a ran ar pezh a soñjit.

– Ya gwelout a rit, Pêrig, estregedon a zo sot gant he mab ! a lavaras ma mamm, laouen o vezañ broudet gant Axel.

– Ne blij ket din memestra... Petra ho peus c'hoant da gaout, neuze ? a c'houlennis evit dizreiñ ar gaoz.

Poent e oa peogwir e santen ma dremm o tont da vezañ ruz.

– Kemerit tri fizza. Unan gant fourmaj-laezh warnañ, unan gant chorizo hag unan gant togoù-touseg.

Pa voe bet tapet tout ar pizzaioù ganin e lakais etre daouarn ma mamm ar pezh goulennet ganti.

Treiñ a reas ar pizzaioù a bep tu ha goulenn :

– Daoust hag-eñ e c’hallit lenn an deziad beveziñ diwezhañ evit bezañ sur eo mat c’hoazh ?

Axel a reas ur jestr evit mont d’he sikour met arrestiñ a ris anezhañ en ur lavarout :

– Sellet ‘m eus dija ha mat eo ! Kustumet on bremañ, Mammig !

– Ya, gwir eo. Kreskiñ a rit buan, ma mab.

Un ehan a reas en he c’homz a-raok kenderc’hel ganti :

– Marteze e fell deoc’h prenañ un dra bennak evit merenn-vihan ? Peadra da eviñ ha da zebriñ ?

Mont a rejomp kuit, Axel ha me, da gerc’hat an traoù a felle deomp debriñ goude merenn. Mont a ris buan a-walc’h evit chom hep leuskel ma mamm en hec’h-unan re bell er stal. Axel d’am heul ez erruis dirak astell ar gwispid.

– Kemerit ar pezh a fell deoc’h. Din-me e vo mat tout an traoù, a lavariz dezhañ.

Axel a sellas ouzh an estajerennoù hag a gemeras ur voestad gwispid chokolad. A-raok distreiñ gant ma mamm e kemerjomp ur voutailhad soda. O c’hortoz hon distro e oa ma mamm, difiñv. An dud tro-dro dezhi a gase selloù ranell dezhi. Tapout a ris krog en he brec’h evit mont d’ar c’hefioù.

Ne oa ket kalz a dud d’an eur-se ha digor e oa kalz kefioù. Ne voemp ket pell o c’hortoz a-raok

lakaat hor produioù war an tapis-ruilh. Ma mamm a yeas da gentañ en tu all d'ar c'hef, e-lec'h ma veze paeet. Met skeiñ a reas he c'horf ouzh ur peul bihan.

– Mont a ra, Itron Ozon ? a c'houlennas Axel.

– Ya, mat eo. Trugarez paotr yaouank, jentil oc'h ! N'eo ket aes din en em ziblasañ pa ne welan tra ebet met kustum on da dapout droug.

Daoust d'am mamm bezañ dall ne laoskas den ebet e blas dezhi evit ma c'hellfe tremen da gentañ. Ur banell a oa skrivet warni « Tud ampechet hag ar maouezed o tougen da gentañ » met ne felle da zen ebet gortoz pemp munutenn ouzhpenn. Neuze e chomjomp a-dreñv an daou zen a oa araozomp. Ma ne vijen ket bet re lent em bije lâret d'an dud-se ha da dout an dud all evel merc'hed ar c'harr-boutin ar pezh a oa war ma c'halon e-keñver o emzalc'h... Met re lent e oan. E-kreizig ma spered e prometis din cheñch pa vefen brasoc'h !

Hon tro e oa. Ar paotr yaouank a oa o labourat gant ar c'hef-se a gemeras hor produioù. Lavarout a reas d'am mamm :

– 11 euro 53 eo, mar plij ganeoc'h.

Kemer a reas he sac'h ha goude bezañ furchet e-barzh e roas he doug-moneiz din. Digeriñ a ris anezhañ ha dispakañ ur vilhetenn 10 euro hag ur pezh 2 euro. Reiñ a ris anezho d'ar paotr a oa o

c'hortoz gant ur sell kurius. Digeriñ a reas tiretenn ar c'hef evit lakaat ar vilhetenn ennañ ha kemer a reas gwenneien a roas din en ur serriñ anezhi en-dro.

– Kenavo deoc'h, a lavaras a-raok treiñ da lavarout demat d'an den a oa a-dreñv deomp.

Kemer a reas ma mamm an traoù hor boa prenet, met disoñjal a reas ur pizza. Axel, a oa paotr aketus, a gemeras anezhañ.

– C'hoant 'peus da gaout un tamm sikour, Itron Ozon, evit dougen ar prenadennoù ?

– Pas, trugarez deoc'h Axel. Degaset 'm eus ur sac'h. Lakaet e vo an traoù e-barzh.

Lakaat a reas pep tra er sac'h en ur gomz gant Axel.

– Gortozit ! Unan 'peus disoñjet.

Axel a lakaas ar pizza er sac'h hag a gemeras hemañ eus etre daouarn ma mamm.

– Ezhomm 'peus eus ho taouarn evit chom hep kouezhañ.

Mousc'hoarzhin a reas ma mamm en ur lavarout :

– Pegen jentil ha desket mat oc'h ! Pêrig, bez' ho peus kemeret ar moneiz ?

– Ya, en ho toug-moneiz emañ, Mammig.

Reiñ a ris anezhañ dezhi. Pa voemp prest ez

ejomp en-dro d'an arsav karr-boutin. Ma mamm a gerzhe pemp metr dirazomp.

– C'hoant 'peus da reiñ ar sac'h din Axel ?

– Mat eo mod-se. Mont a ra mat, n'eo ket ken pounner ha se... Sur oc'h en deus roet deoc'h ar sammad arc'hant resis ?

– Ya ! Kustum on da jediñ dre benn abaoe pell, evit bout sur eo mat.

– Setu perak oc'h ken barrek gant ar matematikou er c'hlas ... a lavaras Axel, neuz ar preder warnañ.

– Ya, marteze.

Didrouz e chomjomp un tamm betek ma lavaras Axel din :

– Kalonek oc'h memes tra ! Ret e vez deoc'h diwall ouzh pep tra evit bezañ sur e vo mat an traoù evit ho mamm...

– Ha ma zad ivez. Dall eo, evel ma mamm.

– 'Peus ket chañs...

– Ne lavarfen ket seurt traoù ! a lavarais, un tamm feuket.

Kerzhout a ris buanoc'h evit mont da gichen ma mamm. Axel a chomas, didrouz, a-dreñv deomp.

Pa errujomp kostez an arsav ez is da welout pegoulz e tremenfe ar c'harr-boutin evit bezañ sur n'em boa ket faziet em fenn. Pemp munutenn a chome. Ne oa ket kalz, met ur banne glav a oa o paouez kregiñ da ober. Axel a zeuas em c'hichen :

– Digarezit ac’hanon, Pêrig... Ken sot on, ne ‘m eus ket soñjet er pezh ‘m eus lâret deoc’h.

Sellout a ris outañ. Diskouez a rae bezañ didro hag e zaoulagad a ziskoueze e vorc’hed.

– Gouzout a ran n’ho poa ket c’hoant da chifañ ac’hanon, met trist on un tammig memestra peogwir e klevan gerioù seurt-se bemdez...

Distroet d’ar gêr e yeas ma mamm da lakaat ar pizzaioù da dommañ. Un nebeudig amzer a oa ganeomp evit aozañ ar pezh a rajemp goude-merenn. Goude un tabut berr e tivizjomp mont d’ar sine da welout ar film nevez-savet gant Marvel.

– N’on bet biskoazh er sine, kazi, a lavarais. Nemet div wech, gant ar skol ma oan ar blez tremenet, en ur sine bihan-tout.

– N’eo ket gwir ??

– Geo... Ne c’hallan ket mont gant ma zud peogwir ne welont ket ar filmoù ha ma mamm a gav dezhi ez on re yaouank c’hoazh da vont ma-unan.

– Ha gwir eo ez oc’h re yaouank c’hoazh, a lavarais ma mamm a oa o paouez erruout er sal-debriñ.

Ul luchadenn a gasis da Axel evit ober dezhañ kompren hor boa bet ar gaozeadenn-se alies dija. Kompren a raen perak ne blijje ket d’am mamm lezel ac’hanon da vont da lec’hioù seurt-se ma-unan met ar bloaz war-lerc’h e vefen er skolaj hag e vefe ret din bout emrenoc’h c’hoazh. Ouzhpenn-se e fellfe din kaout mignoned evit mont da bourmen

ganto. Marteze em befe ur vignonez ivez ...
– ‘Mod-all e c’hallit dont ouzh taol. Prest eo ar
pizzaioù.

Goude ar pred ez ejomp da c’hoari ur pennadig
el liorz peogwir e oa brav an amzer adarre.
Koumoulenn ebet ken en oabl, ha ma ne oa ket
tomm-tre an aer e oa plijus c’hoari evel-se er-
maez. Hor pal a oa klask stekiñ an eil ouzh egile
ha redek kuit hep bezañ stoket.



An abadenn sine ne grogfe nemet da 4 eur, amzer a oa c'hoazh evit mont war-droad betek ar c'hoedig a oa e-kichen ma c'harter. Ned aen ket di alies rak n'em boa na breur na mignoned tro-dro d'am zi.

E-kreiz ar c'hoedig-se e oa ur vilin gozh toull e brenestroù ha livet e vogerioù. Brav e oa bepred. Pa oan-me yaouankoc'h e soñjen e oa ur c'hastell. Lavaret em boa se d'am zud hag int a soñje evel don peogwir ne welent ket ar wirionez. Dizoloet o doa ne oa kastell ebet er c'hoed-se pa oant bet o c'houlenn gant un den bennak emen e oa ar c'hastell. Er penn kentañ n'o doa ket c'hoarzh ket kalz, met p'o doa komprenet e soñjen evit gwir e oa ur c'hastell o doa bet plijadur gant an darvoud. Lavarout a raen «ar c'hastell» c'hoazh evit komz eus ar vilin-se.

Ur stêrig a dremene dre ar c'hoed ivez. Ne veze ket kalz a zour enni en hañv met en nevezamzer, evel d'ar mare-mañ, e veze dour a-walc'h c'hoazh evit bezañ lakaet diaes o klask lammat dreisti hep glebiañ.

Ne oa ket ur c'hoed don, met bras a-walc'h e oa evit en em goll ennañ memestra rak meur a hent a oa ennañ. Gwelloc'h e oa chom hep mont re bell diwar an hent pennañ. Ur wech, pa oan bihan, em boa gwelet ur c'hazh-koad. Heuliet em boa anezhañ. Met hennezh a yae re vuan evidon hag

en em gollet e oan. Dibosupl e oa bet din kavout ma zud en-dro. Dre chañs em boa gwelet un tad-kozh hag en doa sikouret ac’hanon.

Mousc’hoarzhin a ris o soñjal en traoù-se.

– Perak e vousec’hoarzhit evel-se, Pêrig ?

– Evit netra... Emaon o soñjal ez on laouen da gaout ac’hanoc’h da vignon. Rak n’em eus ket kalz a vignoned.

– Ma teujec’h da c’hoari war ar porzh-skol ganeomp e-lec’h lenn e-pad an ehanoù a-bezh, ho pije muioc’h a vignoned sur a-walc’h.

– Ya. Gwir eo, a respontis. Lenn a ran kalz evit da-nevelliñ istorioù d’am mamm. Ne c’hall ket lenn, neuze... Un doare eo evidon da dremen un tamm amzer ganti.

Poent e oa distreiñ d’ar gêr evit mont d’ar sine. Ret e oa bezañ abred evit chom hep c’hwitañ war arsav ar c’harr-boutin.

– A-wechoù e vez kalz tud o vont d’ar sine hag e c’hallfemp c’hwitañ war ar skignadenn ma ne erruomp ket abred a-walc’h, a zisplegas Axel.

N’em boa ket bet tro da vont di c’hoazh, abalamour d’ar gudenn gant ma zud ne oa ket posupl. Un tamm anken a oa ennon rak ne ouien ket penaos ober eno, penaos en em zerc’hel ha tout. Ur bed nevez-flamm e vefe. Plijout a rae din dizoleiñ traoù nevez bepred, dreist-holl pa veze tud em c’hichen. An deiz-se e oa Axel ganin. Eñ a oa bet kalz er sine dija ha gellout a rafe displegañ

din penaos ober. Fiziañs bras am boa ennañ.

Erruet er sine ez ejomp da brenañ tikidi evit Marvel. Ne oa ket kalz a dud o c'hortoz. Ar sine a oa d'an nebeutañ dek gwech brasoc'h eget an hini e oan bet ennañ gant ar skol. Dispar e kavis ar skrammoù a ziskoueze pet plas a chome dieub evit an abadenn c'hoazh. 230 a chome evit ar film e oamp o vont da welout. Me 'gave din e oa ur bern tud, met Axel a seblante kavout se ordinal.

Kement a dud en ur sal vihan ! Penaos e welfemp un dra bennak ? N'em boe ket kalz amzer da brederiañ rak Axel a gasas ac'hanon davet ur paotr a gemere an tikidi da droc'hañ anezho. Pa voent bet troc'het e roas pep un hanter hini deomp en ur lavarout :

– Sal 3 er foñs a-zehoù.

Heuliañ a rejomp e ditouroù evit mont betek ar sal. Un nor bounner a oa hag a-dreñv dezhi e oa teñval an traoù. Un nebeud LEDoù ruz a oa da ziskouez an hent deomp. Un eil dor a oa 5 m pelloc'h, ken pounner hag an hini gentañ. A-dreñv dezhi e tizolois ul lec'h ec'hon.

Chom a ris difiñv o welout pegen bras e oa. Meur a renkad kadorioù-brec'h ruz a oa. Ne c'hallen ken kontañ anezho, kement a oa er sal.

– Woahhh, a estlammis.

– Ya. Ar memes tra am boa soñjet ar wech kentañ ma oan bet amañ, a lavaras Axel gant ur

mousc'hoarzh. Bras-tre eo ar sal, ha c'hoazh, n'eo ket hini vrasañ ar sine !

Treñ a ris ma fenn hag e welis anezhañ : ar skramm bras. Adarre e taolis ur seurt « woahh » o welout anezhañ.

– Amañ e vo skignet ar film ? a c'houlennis buan, ken bras ar mall ganin kaout ar respont.

– Ya, amañ e vo. Deuit da azezañ rak tud all a gemero ar plasoù gwellañ ma ned comp ket da azezañ diouzhtu.

– A ya, digarez ! Emen emañ ar plasoù gwellañ ?

Axel a gemeras ma dorn hag a redas un tamm, betek erruout e kreizig-kreiz ar sal dirak div gador-vrec'h ruz a oa dieub. Azezañ a rejomp warno. Aes e oant hag en em sentis em bleud war ma hini.

– Pegen plijus e c'hallfe bezañ ar gador-mañ evit lenn. Gwelloc'h evit ma gwele, me lâr deoc'h.

– Azezet e vimp mat evit ar film, se zo sur. Den ebet ne vo dirazomp. Ne vo den bras ebet evit kuzhat ar skramm diouzhimp.

– Trugarez Axel ! Dibabet ho peus mat ar plasoù !

– Ha gwelet ho peus amañ ?


O tiskouez e oa ur seurt prenestr din.

– Petra zo eno ? a c'houlennis.

– Dre eno e vez luc'hvannet ar film.

– A ya ? Me soñje din e teue ar filmoù er sine evel war ar skinwel : dre dreñv ar skramm.

Axel a c'hoarzhaz un tamm, me ivez daoust ma oan un tamm dipitet gant ma diouiziegezh. Komz a rejomp c'hoazh eus ar pezh a veze gwelet er sine betek poent ar bruderezhioù. Ne felle ket din c'hwitañ lommig bennak ebet eus ar pezh a welen. Ar skramm a oa sklêrijennet hag ar son a zeue eus pep lec'h er sal. Dispar e kaven se. Klask a ris treiñ ma fenn evit gwelout penaos e veze skignet ar film dre ar prenestrig met ne oa tu ebet, re uhel evit gwelout petra a oa e-barzh.



Ar film a oa dispar met hir-tre ha goude un hantereurvezh o klask moustrañ war ma c'hoant mont d'ar privezioù ne c'hallen ket mui gortoz hag e lâris da Axel :

– Ret eo din mont da staotiñ.

– Ok.

Axel a oa o sellout ouzh ar film ha ne droas ket e zremm evit respont din.

Du e oa ar sal ha diaes e oa mont betek an nor. Pa erruis etre an div dor e oa teñvaloc'h c'hoazh en-dro din. Astennet 'm boa ma divrec'h dirazon en un dasstriv. Soñjal a ris en ma zud ha pegen diaes e c'halle bezañ chom ar vuhez a-bezh hep gwelout tra ebet.

Pa voe echu ar film ez ejomp er-maez da dapout ar c'harr-boutin. O kaozeal e oamp diwar-benn ar film hag ar pezh n'hor boa ket komprenet, pe o tabutal war ar pezh a vefe el lodenn Marvel o tont... Pignat a rejomp er c'harr-boutin en ur gaozeal c'hoazh ha goude un 10 munutenn bennak e welis e oa c'hoarvezet un dra fall : ne oa ket ar c'harr-boutin mat !

– Axel, ret eo deomp kuitaat ar c'harr-boutin-mañ, n'eo ket an hini a ya d'am c'harter... Ne 'm eus ket taolet evezh a-raok mont e-barzh.

– N'eo ket strikt, diskenomp neuze.

Pouezañ a ris war an nozelenn evit diskouez d'ar blenier e felle deomp mont kuit d'an arsav

kentañ. Diskenn a rejomp ha pa voe aet kuit ar c'harr-boutin en em gavjomp en ur c'harter didud ha tost dic'houloù.

– Gwech ebet ne oan bet dre amañ, a lavariz da Axel. Ret eo deomp klask emen emañ arsav an tu all, evit distreiñ d'ar sine.

An arsav a glaskjomp, met goude dek munutenn e paouezjomp. En aner hor boa klasket.

– Pet eur eo, Axel ?

– N'ouian ket, n'eus eurier ebet ganin. Laosket em eus ma hini er sal-dour pa oan bet o walc'hiñ ma daouarn.

– Na ganin kennebeut. Sot on, laosket 'm eus anezhañ war ma zaol-noz...

– Petra vo graet bremañ ? a c'houlennas Axel, ankeniet un tamm.

– Ret eo kavout an arsav buan, rak ma 'z erruomp re ziwezhat er sine e c'hwitimp war ar c'harr-boutin diwezhañ evit distreiñ du-mañ.

Mont a rejomp dre meur a straed hep kavout arsav karr-boutin ebet. Bremañ e oa tost serret an noz, ha ne welemp mui kalz tra.

N'em boa ket c'hoant da lavaret da Axel, met un tamm aon am boa.

– Marteze e c'hallomp pellgomz d'hon tud ? a ginnigas Axel.

– Ur pellgomzer zo ganit ? N'em eus hini ebet c'hoazh.

– Na me... Unan am bo pa vin er pevare, o deus lavaret ma zud.

Sur e oan e oamp war-zu ar maeziou rak nebeutoc’h-nebeutañ a diez a oa tro-dro deomp.

Bremañ e oan sur hor boa c’hwitet ar c’harrboutin diwezhañ. Muioc’h eget un eurvezh e oa abaoe m’hor boa kroget da gerzhout.

Soñjal a raen em mamm. Pegen ankeniet e tlee bezañ ! Marteze he doa pellgomzet d’an archerien, dezho da vont war hol lec’h... Kastizet-bras e vefemp ganto, sur eo ha n’eo ket marteze !

Ken buan e oamp o kerzhout ma rae droug ma zreid din. Hep ger ebet e chomjomp kichen-hakichen o kerzhout dre hentoù bihanoc’h-bihanañ. E peoc’h an noz e klevis un trouz... Leñvadennou Axel e oa. Klasket en doa chom didrouz met klevet em boa memestra.

Paouez a ris da gerzhout ha kemer a ris e zaouarn :

– Mont a raio, Axel, kavet e vo hon hent en-dro !
Sur eo.

– Kollet omp da vat ! E-kichen ur c’hoedig emamp... N’emamp ket mui e kêr.

– Kavout a rin an hent. Fiziout a rit ennon ?

Stouiñ a reas e benn evit lavarout « ya » din.

– Gallout a rit kerzhout c’hoazh pe chom a reoc’h amañ d’am gortoz ? Me zo o vont da glask war lec’h un den bennak evit dont d’hor sikour.

– Poan ‘m eus em zreid, a respontas Axel o leñvañ. Met ne ‘m eus ket c’hoant da chom amañ ma-unan da c’hortoz unan bennak a zeufe d’hor sikour.

– Deomp da gavout un den bennak neuze !

Adkregiñ a rejomp da gerzhout ha goude un hentig difin ez errujomp gant un hent brasoc’h. Ne oa ket kalz a girri-tan o tremen, met muioc’h eget ar pezh hor boa gwelet betek-henn.

Sevel a ris ma dorn evit c’hoari biz-meud.

– Petra emaoe’h oc’h ober, Pêr ?

– Evel-se e c’hallomp arrestiñ ur c’harr evit displegañ hor c’hudenn ha klask un tamm sikour.

– Ya, met dañjerus eo... Marteze e vo un den fall hag a chomo a-sav.

– Kredit ennon, Axel ! Ha ma kav deomp eo dañjerus e redimp pell, ok ?

– Ya...

Ne oa ket tomm an noz hag e krogemp da santout ar yenijenn pa arsavas ur c’harr just dirazomp. Mont a rejomp betek ennañ. Digor e oa prenestr ar c’harr.

– Demat paotred yaouank. Petra emaoe’h oc’h

ober amañ d'an eur-mañ ?

– Kollet omp, Itron... a lavaris.

– Kollet oc'h ? Emen emaoch o chom ?

– E karter Sant-Gwenn... a respontis

– E Gwened ? Pell emaoch neuze, n'emaoc'h ket mui e Gwened amañ.



Souezhet e voen, ne oa ket posupl hor bije kerzhet kement-se. Met marteze hor boa kemeret ur c'harr-boutin a yae d'ar c'hêrioù bihan tro-dro da Wened....

– Posupl e vefe deoc'h sikour ac'hanomp, mar plij ganeoc'h ?

– Ya, evel-just ! Deuit e-barzh.

Sellout a ris ouzh Axel evit gwelout e benn. Mousc'hoarzhin a ris dezhañ evit diskouez n'em boa ket aon da vont gant ar c'harr-se.

Pa voemp azezet er c'harr e c'houlennas ar plac'h diganeomp :

– Emen ho peus c'hoant e laoskfen ac'hanoc'h ?

– Digarezit, met pet eur eo, Itron ?

Ma c'hellfemp tapout ar c'harr-boutin diwezhañ c'hoazh e c'hallfemp mont d'ar sine pe, ma vefe re ziwezhat, e c'houlennfen diganti mont betek du-mañ.

– 10 eur noz eo, a respontas ar vaouez.

– N'eo ket gwir ? Posupl e vefe deoc'h mont betek ma c'harter ?

– Pell eo, met ya, bez' e c'hallan !

Ma zad a vefe fuloret sur a-walc'h ! N'em befe ket droed ken da vont er-maez e-pad meur a viz... Sur e oan e vefen kastizet er gêr.

Em c'hichen e oa Axel o vorediñ, e benn war ma skoaz.

N'em boa ket gwelet fin ar veaj, ken skuizh e oan ma oan manet kousket ivez. Dihunet e oan bet gant ar c'harr o chom a-sav. Em c'harter e oamp erruet, dre zegouezh e oa just e-kichen ma zi. Ur c'harr-polis a oa parket dres dirazañ, e c'houleier war-enaou.

– Ho ti eo ? a c'houlenas ar vaouez ?

– Ya, hennezh an hini eo ! Trugarez deoc'h evit bezañ deuet d'hor sikour !

– Kudenn ebet... Mont a ran ganeoc'h betek ho ti.

Axel a oa dihunet ivez. Mont a rejomp er-maez eus ar c'harr.

Digor e oa an nor ha mouezhioù a glevin en diabarzh. O tont en ti e weljomp e oa ma zud azezet ouzh an daol gant daou archer ha mamm Axel. An tad hag ar mammoù a oa o leñvañ.

– Axellllll !!!!!

Tout an dud a voe souezhet bras gant an huchadenn-se. Didrouz ha difiñv e chomas an holl e-pad div eilenn.

– Petra zo ? Perak ho peus huchet « Axel » ? a c'houlenas ma mamm.

Met mamm Axel ne oa ket ken o selaou outi, ken buan e oa savet diwar he c'hador evit mont da vriata he mab.

– Emen e oac'h ? Pegen ankeniet e oamp ! Perak n'ho peus ket pellgomzet deomp ? O c'hortoz ac'hanoc'h abaoe 3 eurvezh emamp....

Ne laoske ket amzer d'he mab da respont d'he c'houlennoù.

– Petra a c'hoarvez amañ ?????? a huchas ma zad ken kreñv ma paouezas tout an dud da gaozeal.

– Distroet omp, a respontis.

– Ma labousig ! a lavaras ma mamm en ur sevel evit mont war ma zu.

Mont a ris d'he briata. Stardañ a ris kreñv anezhi. Aon am boa bet ivez memestra. Laouen e oan o welet ma zud !

A-benn ar fin n'oan ket bet kastizet ganto peogwir o doa komprenet mat perak n'oamp ket erruet d'an eur. Met un abeg all e oa evito evit nac'h ouzhin da vont d'ar sine en-dro ma-unan. Ret e vefe din gortoz pell c'hoazh...

Goude bezañ bet trugarekaet a-feson e oa aet kuit an itron he doa kaset ac'hanomp betek ma zi. An archerien ivez. Axel a oa ken skuizh ha me, met ret e voe deomp displegañ meur a wech Petra 'oa c'hoarvezet deomp a-raok gellout mont da gousket. Axel a yeas kuit gant e vamm. Spi 'm boa ne oa ket bet re skoet gant e zevezh hag e teufe en-dro d'am gwelet...

D'an noz-se em boa kousket mat. Mat-tre memes ! Muioc'h eget daouzek eurvezh. Skuizhus e oa bet an devezh, traoù a vefe da gontañ er skol al Lun war-lec'h !

Ar skol a oa o paouez kregiñ. Tout bugale ma c'hlas a oa azezet en o flas. Axel em c'hichen. N'hor boa ket bet amzer da gaozeal asambles ar mintin-se peogwir e oa-eñ erruet tost gant dale er skol, evel da gustum.

– Kemerit ar pezh ho poa da ober evit hiriv : deskrivañ pe dresañ ho haroz muiañ-karet.

Kemer a ris ur follenn e-barzh ma sac'h-skol. Skrivet em boa un destennig diwar-benn Gandhi, peogwir em boa lennet ul levr diwar e benn hag a zisplege pebezh paotr e oa !

O kemer ar follenn e-barzh ma sac'h e welis an dresadenn am boa graet evit ar varaerez : ur smiley laouen e oa, ha skrivet em boa « trugarez deoc'h itron Foreg » dindan, gant ul liv disheñvel evit pep lizherenn.

Ar re all em c'hlas o doa dibabet harozioù evel Nelson Mandela, Martin Luther King... Ul lodennig eus tud ar c'hlas n'o doa ket komprenet ar boelladenn hag o doa kemeret Spiderman, Batman... C'hoarzhin a reas ar c'hlasad pa ginnig-jont se dirak an holl.

Tro Axel e oa bremañ. Mont a reas e-tal an dud ha kregiñ :

– Ma haroz muiañ-karet eo... Pêrig, ur paotr a wel mat !

Peurvoulet e-ti Ouestelio, 29200 Brest
Disklêriet hervez lezenn e miz Here 2019